



DIALOG
ETRE
EUN DOCTOR
HAC
EUR BUGUEL

MONTROULEZ
E ty J. HASLÉ Impr. ha Levrer
8, ru a Aiguillon, 8.

1872

T XIX H/9





DIALOG

ETRE

EUN DOCTOR

HAC

EUR BUGUEL.



AN DOCTOR.

BONJOUR, Mabic, pelec'h it-hu?

AR BUGUEL.

Da glask eur Mestr e zan eun tu.

AN DOCTOR.

Me zo Doctor, ha mar kirit

Me raï scol dec'h mar am pedit.

AR BUGUEL.

Bet oun er scol gant Doctoret,

Ha tout o c'havan borodet,

O clask deski da beb-unan
Ar pezh ne ouzont ket o-hunan.

AN DOCTOR.

Petra ne oar an Doctoret?

AR BUGUEL.

Meur a dra zo ne ouzont ket.

AN DOCTOR.

Ha te a oar mui egueto?

AR BUGUEL.

Mar kirit, ni a zisputo.

AN DOCTOR.

Te da zisput ouz eun Doctor!

AR BUGUEL.

Ho respont a rin gant enor;
Ha na oufac'h goulen netra
Na roïn rezon d'êc'h anezâ.

AN DOCTOR.

Piou en d'eus crouët ar bed-man?

AR BUGUEL.

Nep a r'er Doue anezan.

AN DOCTOR.

Ha te oar petra eo Doue?

AR BUGUEL.

Allas! ne oun ket, na c'honi ive :
Dre ar feiz deomp-oll eo desket
Kement a zo en deus crouët,
Var guement zo eo souveren,
Da guement zo e courc'hemen ;
An nep ne zentont ket ountâ
Ne vank james d'ho funissa.
Ouspen ez eo universel,
E c'hel tout, ez eo eternal ;
Mes ne oufe den explika
Na renta rêzon anezâ.
O altitudo! na ellomp ken :
Adoromp-en hep e gompren.

AN DOCTOR.

Petra dle an oll da Zoue?

AR BUGUEL.

E zervicha corf hac ene.

AN DOCTOR.

Peur da penos er servicher?

AR BUGUEL.

Pa ra peb-unan e zever.

AN DOCTOR.

Petra eo dever peb-unan ?

AR BUGUEL.

Dever an oll guitibunan.

AN DOCTOR.

Petra eo dever an Doctoret ?

AR BUGUEL.

Pratika ar mad o d'eus desket,
Rac inutil ha coll amzer
Eo diski ar mad hep è ober.

AN DOCTOR.

Petra eo dever eur Buguel ?

AR BUGUEL.

Diski beza eun den santel.

AN DOCTOR.

Peur en em goll eur c'hrouadur ?

AR BUGUEL.

Pa ro d'e dad displijadur.

AN DOCTOR.

Petra ra dezau mont da goll ?

AR BUGUEL.

Beza re lezet en e roll.

AN DOCTOR.

Pelec'h e tesker follentez ?

AR BUGUEL.

O c'henti goal compagnunez.

AN DOCTOR.

Piou zo danjerus o c'henti ?

AR BUGUEL.

Nep zo sujet da sotoni :

Dibaot buguel a c'hent tud sod,

Euz o sotoni na zesk lod.

AN DOCTOR.

Piou a respont euz anezo ?

AR BUGUEL.

Nep a zo tad ha mam dezo.

AN DOCTOR.

Petra eo dever tad ha mam ?

AR BUGUEL.

Miret o bugale divlam.

AN DOCTOR.

Penos ec'h ellont-y é ober ?

AR BUGUEL.

Oc'h o suja da chom er guer :

Mar o lezont re da vale,
E teuint libertin hep dale.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o instrui ?

AR BUGUEL.

Dious o speret, dre ma tui.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o e'horija ?

AR BUGUEL.

Pa zint bian, eas da blega,
Facilitoc'h eo plega planten
Eguet na deo plega guezen.

AN DOCTOR.

Peur e tleer o dimezi ?

AR BUGUEL.

Pa o deus oad ha fantasi,
Guell eo abret dimezi merc'h
Eguet na deo caout keuz varlerc'h.

AN DOCTOR.

An tad, ar vam hac int a dle
Ober stad eus o bugale ?

AR BUGUEL.

Tad a ra stad eus e vabic
En desk da veza mab prodig;
Ha mam a ra stad ous he merc'h
Peur-liessa a oüel var'erc'h.

AN DOCTOR.

An tad, ar vam, hac int a dle
Reï o zraou oll d'ho bugale?

AR BUGUEL.

Sotoni bras ve da eun dên
Discrêgui eus tout e voyen,
Ha rancout goulen goude-se
E ezomou ous bugale:
Sæntoc'h eo goulen oc'h tad
Évit d'an tad goulen dious mab.
Guelet hon eus meur a exempl
Elouez tud erê ha tud sempl,
Ar vugale o kass ractal
Ho zad, ho mam d'an hospital.

AN DOCTOR.

Pe etre piou en tieguez
Ne vez nemeur a garantez?

AR BUGUEL.

Etre bugale ha lesvam,
Ispicial mar deu d'ho blam,
Rac al lesvam ne ket caret
A galon vad gant minoret :
Dibaot lesvam a gar ive
Bugale-all keit hac he re.

AN DOCTOR.

Ha te oar micher priedou?

AR BUGUEL.

Clévet e meus o doareou.

AN DOCTOR.

Peur vez carantez etre-se?

AR BUGUEL.

Pa na zeffot netra deze.

AN DOCTOR.

Ha peur e vank an union?

AR BUGUEL.

Pa vank dezo pourvision.

AN DOCTOR.

Ha peur e vezont en coler?

AR BUGUEL.

Pa vank unan en e zever.

AN DOCTOR.

Piou a zo cassaüs d'an oll?

AR BUGUEL.

An diaoul hac eur c'hreg foll.

En eun dezert eo guel beza

Ha caout eno peoc'h da veva

Evit n'en deo chom assambles

Gant greg ebet. mar dê folles.

AN DOCTOR.

Hac ar graguez a gar ar guin?

AR BUGUEL.

Eus a enor n'en dint ket dign.

Eur vreg zo custum da eva

A bep tout ne dal netra,

Oc'h peb honestis e ser dor,

Hac oc'h pep pec'het e tigor.

AN DOCTOR.

Petra servich canna eur vreg?

AR BUGUEL.

Lacât e maliç da redeç.

N'en d'eus serpant danjerussoc'h ,
Leon na dragon terruploc'h
Eguet eur vreg zo en coler ;
Ous e c'hanna zo mit danjer.

AN DOCTOR.

Pelec'h caffet-hu eur vreg vat?

AR BUGUEL.

D'an Env' ranker mont d'ec'here'hat.

AN DOCTOR

N'ac ar plac'het , va buguel kès ,
Ha te c'heus oute carantez?

AR BUGUEL.

Va zad en d'eus va c'helennet
Ne dostaïn james ous plac'het ,
Rac tromplus int eals aneze ,
Ha collet ar bed-mâ gante.
O min a zo douç eguis mel
Hac a zeboch meur a vuguel ;
Mes ne vezet ket pell ganto
Eguis ar vestl nad int c'huëro.

AN DOCTOR.

Petra a ra da gals a dut

Divar o fen caout mil disput?

AR BUGUEL.

Petra ma zeo an dud-se sod,
Eus a vil malheur clask o lod.

AN DOCTOR.

Ha te anve plac'h fur ebet?

AR BUGUEL.

N'a m'eus ket cals anavezet :
Ar plac'het fur, var a glevan,
Ne d'int ket commun er vro-man.

AN DOCTOR.

Pe da lec'h eta int-hi et?

AR BUGUEL.

Elec'h n'en d'eus ket a voaset :
Biscoas plac'h fur, fur na voe pell
O c'henti goas na ne voe vell.

AN DOCTOR.

Ha na dleer ket en em c'henti
Evit caout lec'h da zimizi?

AR BUGUEL.

Dimizi a zo permetet,
Mes sotoni eo kemeret

Eur plac'h en d'eus meur a c'halant
Hac eus an oll a zo contant :
Guell eo guênen caout eur mignon ,
Eguet eur plac'h en donêzon.

AN DOCTOR.

Ha te c'heus cals a vignonet?

AR BUGUEL.

Ne ansavan mignon ebet.
Ar mignonet eus ar bed-man
So inconstant, var a glevan :
Dibaot a zên a ve tromplet
O re fiziout er mignonet.

AN DOCTOR.

Pegueit e pad ar vignonach?

AR BUGUEL.

Bete'n ezom, pas davantach.
Nep en d'eus arc'hant hac a rô
A gav mignonet en peb brô ;
Mar deu ezom dezan goude ,
E vignonet en dizene.

AN DOCTOR.

Petrara nep a brest arc'hant

Da eur mignon hep caout goarant?

AR BUGUEL.

C'hoant coll en d'eus hervez fêçon

Hac e arc'hant hac e vignon :

Kenderv-gompes out pa bresti,

Ha dên ingrat pa c'houlenni.

AN DOCTOR.

Na nep a ra eun donêzon,

Petra sonch-èn en e galon?

AR BUGUEL.

Sonjal a ra en devezo

Daou c'hement mui eguet na ro :

Panevet se, certenamant,

Nebeut a zên a ra presant.

AN DOCTOR.

Hac èn a zo dên e nep canton

N'en d'eus adversour ha mignon?

AR BUGUEL.

Dibaot a zên a zo er bed-mâ

N'en d'eus er c'har hac er c'hassâ.

AN DOCTOR.

Pe dious piou e renker tremen?

AR BUGUEL.

Dioc'h ar bed-oll, mar be moyen,
Rac ne d'eus den na ell ober
Ha drouc ha mat gant an amzer.

AN DOCTOR.

Pelec'h e sao dizantion ;

AR BUGUEL.

Elec'h ma vank soumission ;
An dud superb a sav ato
Eun disput bennac etrezo.

AN DOCTOR.

Na pe ous piou ne renker ket
Caout james disput ebet ?

AR BUGUEL.

Ne dleer caout gant hini,
Ma na ellet ket trec'hi.
Marc'h a resist oc'h ar c'hentrou
A ra gaou bras ous e gostou ;
Ha sot eo den da resista
Ous nep zo creoc'h egueta.

AN DOCTOR.

Penaos e fach ar vignonet ,

Na peur e vezont accordet ?

AR BUGUEL.

Divar ar guin peur liessa
E custumont en em facha ,
Ha d'o accordi goude-ze
E renker kaout guin adare.

AN DOCTOR.

Ha te oar ive eva guin ?

AR BUGUEL.

Re yaouankik ê choas va min :
Gant an Doctoret el lêzan ,
A raï guell uzach anezan .

AN DOCTOR.

Nep zo pedet da eur banket ,
Ha ne ket sot ma n'en da ket ?

AR BUGUEL.

Furoc'h ê calz mar chom er guer
Ma na oar eva dre voder .

AN DOCTOR.

Petra ra an hini ev re ?

AR BUGUEL.

Diski d'ar bed oll e zoare .

Pa vez secret, mar bez mezo,
Kement a oar a lavaro,
Ha calz c'hoas avichou ouspen,
Pa zao e vanne en e benn.
Ar paoura tout, evet dezan,
A zo pinvidic, emezan!
Ha gouscoude en deveus poan
O clask kaout yot silet da goan.

AN DOCTOR.

Piou a ra d'an dud guella cher?

AR BUGUEL.

Nep en d'eus joa oc'h e ober.
Digant eur mignon eo guel caout dour
Evit guin digant eun traïtour.

AN DOCTOR.

Mar ez pê arc'hant, te effe guin,
Evit beza yaouank da vin? —
Mes n'elles eva nemet dour,
Abalamour ma zout paour. —

AR BUGUEL.

Me ne m'eus nac arc'hant nac aour
Ha gouscoude ne d'oun ket paour;

Pinvidic ouñ couls a nicun ,
Pa zon contant eus va fortun ,
Ha clêvet a m'eus ê peb lech ,
Eo guell dour ha bara sec'h
Eguet caout arc'hant leis an ty ,
Ma nê contant nep en d'eus-hy.

AN DOCTOR.

Piou a zezir ha n'en d'eus ket ?

AR BUGUEL.

Nep a friq ha ne c'houndit ket.
Dibaot eo guelet eur prodig
O chom pell amzer pinvidic ;
Dibaot ivez eur feneant
A zestum cals eus a arc'hant.

AN DOCTOR.

Piou zo beo hac en deffe naon ?

AR BUGUEL.

Nep a chom re bell var e scaon.

AN DOCTOR.

Piou ne verit ket a zicour ?

AR BUGUEL.

Nep a zo crên ma na labour.

AN DOCTOR.

Petra ê avantach ar re baour
Var nep en d'eus arc'hant hac aour?

AR BUGUEL.

Eun avantach a zo caër,
N'ho d'eus ket aoun rac al laër;
Rac ne veler ket al laëron
O vont nemeur en ho c'hanton.

AN DOCTOR.

Pelec'h eta e vezont-hi?

AR BUGUEL.

Eleac'h ma santont eus ganty.

AN DOCTOR.

Piou a zo custum da laërez?

AR BUGUEL.

Nep en d'eus aoun rac paourentez.

AN DOCTOR.

Ha creski a ra ar voyenn
O kemeret madou an estrenn?

AR BUGUEL.

James dên ne binvidica
Oc'h ober gaou eus e nessa :

Ar madou drouk akisitet
Na brospereñt gant dên ebet.

AN DOCTOR.

Nac ar madou destumet pront?

AR BUGUFL.

Dissilla prêst a gustumont.

AN DOCTOR.

Hac al laëron a ell miret
N'ho deffe ket a hoan speret?

AR BUGUFL.

Natur al laër eo beza lent,
Caout aoun ha spont : pa za en hent
E sonch dezan ez eus bepret
Eur re bennâc oc'h e redec.

AN DOCTOR.

Pet seurt laëron zo er bed-mâ?

AR BUGUFL.

Difficil ve o nivera,
Rac ma ve an oll examinet,
Nebeut a zên just a gaffet,
Hac ar pes am eston muya
Hac a ra poan dîn da sonja,

EO ma renter e pep canton
ENORIOU d'ar brassa laéron,
HAC eun nombr bras a re dister
DIRAC an oll a bunisser.

AN DOCTOR.

PIOU a gar enor er bed-má?

AR BUGUEL.

AN OLL zo contant anezá.

AN DOCTOR.

PIOU a ra enor d'he nessa?

AR BUGUEL.

NEP ep d'eus carantez ountá.

RENTA enor hep carantez

ZO trahison pe traïtourez.

AN DOCTOR.

PEUR e chènch an dud fantazi?

AR BUGUEL.

PA gresk ar madou en ho zy.

DIBAOT hini, mar d'eus nicun,

NA chènch humor pa chènch fortun,

AR fortun vras, an enoriou,

EUS a Sænt a ra diaoulou.

AN DOCTOR.

Nac a re a glask enoriou,
O publia o vertuziou ?

AR BUGUEL.

Dibaot ar yar na goll e vi
O cana re goude dozvi,
Ha dibaot dên en em bompat
Na goll e boan oc'h ober vat.

AN DOCTOR.

Ha te c'heus joa eus an enor ?

AR BUGUEL.

Ne glaskàn ket a zizenor.

AN DOCTOR.

Pe an enor pe ar madou
Eo ar guella eus a zaou ?

AR BUGUEL.

Guell eo brut mad da bep hini
Eguet caout madou leïs an ty.

AN DOCTOR.

Hac ar bed-oll a glask enor ?

AR BUGUEL.

Coulz an azen hac an Doctor,

Dibaot an dên , m'ar d'eus nicun ,
A zo contant eus e fortun.

AN DOCTOR.

Petra a gredes-te eus an dud
A zo custum da gaout goal vrud?

AR BUGUEL.

Dibaot chiminal a voguet
Anez na ve tân en oalet :
Dibaot en d'eus goal renom
Na dê clouar ma na dê tom.

AN DOCTOR.

Pe oc'h tra e c'heus-te joa?

AR BUGUEL.

Ous eun dra vad pa er c'havan.

AN DOCTOR.

Petra ar mad a blich dide?

AR BUGUEL.

Beza bepret ê grac Doue.

AN DOCTOR.

Ha te a c'heus c'hoarzet biscoas?

AR BUGUEL.

Ne gredan ket em he c'hoas.

Clêvet e m'eus o re c'hoarzin
Na zestumer nemet chagrin :
Goude c'hoarzin e teu gouëla,
Goude c'hoari, huanada.

AN DOCTOR.

Perac ma remecker è peb dèn
Brêmâ trist hac en bet taouen ?

AR BUGUEL.

Allas ! dre ar c'henta pec'het ,
D'an inconstanc omp oll-sujet,
Ha ne ell dèn moralamant
Beza parfetamant contant
Ken a allo evit biken
Possedi ar mad souveren ,
Rac bepret an adversite
Zo c'harp oc'h ar brospérité.

AN DOCTOR.

Ha te voar ive petra ra
Ma zeus cals contant er bed-mâ ,
Ha cals all pere ne d'int ket ,
Carguet a chagrin o speret ?

AR BUGUEL.

Ar stad emeus ar c'houstianç
Peurvuia a ra an differanç ;
Rac nep a vev ê guir gristen
Zo patient en e anken ;
Evel Job int contant bepret ,
Er c'hlénvet couls hac er yec'het ;
Bepret o deveus resignanç
D'ar gundu eus ar Brovidanç ;
Mes, er c'hontról, an dud mechant
A souffr ato diezamant .

AN DOCTOR.

Perac eta na chènchont-hy ?

AR BUGUEL.

Difficil bras eo distrei :
Cos guezen zo droug da blega ,
Kent e torre eguet heüna.
Eun dên yaouank da fall pa za ,
Ne vella ket evit cōsa ,
Pe mar chènch eun draic bennac ,
Ne chèncho ket a galon vad .

Eur c'hos louarn hac èn dare
Guelet yar c'hoas a gare :
An nep na chènch a vir galon
A gar ar goal occasion.

AN DOCTOR.

Me vel ervat, buguel yaouank,
Ne zeffot ket did a skiant ;
Mes lavar dîn pe seurt micher
A guemeri gant an amzer?

AR BUGUEL.

C'hui zo Doctor ha dèn savant,
Livirit dîn ho santimant?

AN DOCTOR.

Me false dîn, pa zout habil,
Reï dit eun etat difficil.

AR BUGUEL.

Difficulte a zo partout ;
Roït dîn unan d'eus va gallout.

AN DOCTOR.

Me vel ervat na gueres ket
Nac ar groaguez, nac ar merc'het ;
Ma o c'hares, e rafes fortun

O timisi couls a nieun ;
Mes pa ne zint dioc'h da zivis ,
Ret é dit beza dèn a ilis ;
Ha ma keres, en eur redeç,
Me tesko da veza bêlec.

AR BUGUEL.

Eus a guemen-se noun ket dign ,
Ha ne garan ket eva guin .

AN DOCTOR.

Pretra vezi-te-ta, manac'h ?

AR BUGUEL.

Aoun bras emeus n'am be re veac'h.
Ar froc a zo dies da zouguen ?
Ha me gred ez eus meur a zên ,
Ma c'hallent o seneh oc'h rochedou,
A raë frankis er c'houenchou.

AN DOCTOR.

Me vel erfat dioc'h da humeur
Na vezi ket na tad na breur ;
Mes markeres, da viana ,
Avocat e c'hilli beza.

AR BUGUEL.

Ma ven avocat e ranken
Souten ar gaou hac e zifen ,
Ha rei euzul da bep-hini
Dious e humor ha faltasi ,
Pe aotramant em disineganç
Chom hep pleñ en aodianç.

AN DOCTOR.

Petra vizi-te ta, soudart?

AR BUGUEL.

Ne doun ket custum dious an art.
Ar soudardet tout peurvuia
A zesk laeres , a zesk pilla ;
Hounes a zo eun etat fall ,
Ret ê clask din eur vicher-all.

AN DOCTOR.

Pa na blich etat ar bed dit ,
Ret ê din da gass da hermit.

AR BUGUEL.

Roit eta din hermitach ,
Ne c'houlennan ket davantach ;
Rac evit chom etoues an dud ,

Emeus aon bras n'am be goal vrud.

AN DOCTOR.

Peseurt goal vrud a pezo-te
Mar bevez mad hervez Doue?

AR BUGUEL.

Ar bed-oll a so decriet,
Ha no deffe ket faziet;
Ar veleyen couls a re-all
A zo sujet d'an teodou fall;
Ar venac'h paour, er c'houenchou,
N'in ket exant dious teodadou;
Ar priedou, ha tad ha'mam
A zo bepret dindan o blam;
Ar groages kès hac ar merc'het
A zo ganto disenoret;
Mestr ha mestres o tempesti,
Servicher o feneanti,
Tud a justic o ruina,
Ar varc'hadourien o trompla,
An dad gentil o vouel-drêti,
Ar baysantet o vurmuri;
N'en d'eus itron na demesel

A ve exant dioc'h o zravel ;
Ar bed-oil zo tud fall dezo ,
Ne chomin ket gante er vrô.

AN DOCTOR.

Pa c'heus aon rac an teodou fall ,
Me reiñ dit eun avis-all :
Studi caër ha bez eun Doctor,
Dên ne doucho ous da enor.

AR BUGUEL.

An Doctoret couls ha re-all
A zo sujet d'an teodou fall ;
Enoret ve o c'halite ,
Pa ne vet o superbite ;
Hennes eo vic an dud savant
Caout vanite eus e skiant.

AN DOCTOR.

Va buguelic, fouetet e viot ,
Rac re lijer oc'h a deot.

AR BUGUEL.

Mar bezan fouetet, me zo zur
Nep am foueto na vo ket fur ;
Perac fouetta eur buguel kès

Rac ma lavar ar virionez.

AN DOCTOR.

Ar virionez a so cassaüs?

AR BUGUEL.

Ia da nep a zo cablus.

Ret eo lezet nep en d'eus gal

D'en em gravat he da c'hrogñal.

Nep a gundu goal vuez

A vezo flêmet alies.

Parlant a rit ous fouetta ;

Fouettit oc'h azen da guenta ,

Ha miret o skiant ganeoc'h ;

Me gavo guell Mestr eguedoc'h.

FIN

Moulet e Montroulez, e ty J. HASLÉ, ru
a Aiguillon, 8, e pe ec'h e caver bep seurt
levriou gallec a brezouneec.